

ALAIN LE DIUZET

VA YEZ KARET



Cours Élémentaire DE LANGUE BRETONNE

Illustrations de Xavier HAAS

ALAIN LE DIUZET

VA YEZ KARET



Cours Élémentaire DE LANGUE BRETONNE

Illustrations de Xavier HAAS

AVERTISSEMENT

Ce petit ouvrage, sans prétention, peut être très utile aux bretonnants qui ne savent pas lire leur langue maternelle ainsi qu'à tous ceux qui, ayant pour les aider un professeur compétent, désirent s'initier à un parler considéré, à tort, comme difficile, voire hermétique.

L'écriture bretonne est presque phonétique. La syntaxe possède des particularités avec lesquelles l'on se familiarise rapidement. La composition des mots est d'une aisance vite reconnue.

Seules les mutations peuvent constituer un obstacle momentané. Mais les règles en sont simples pour qui aime les langues. L'usage a vite fait de les assimiler. Dans cet ouvrage, les lectures sont, on ne peut plus faciles, les exercices gradués et la conjugaison présentée avec méthode de façon qu'un effort quotidien de quelques instants doit aboutir à des résultats pratiques.

Puisse ce petit livre contribuer à faire aimer notre langue bretonne si riche de moyens expressifs !

Alain LE DIUZET.

AN DEVEZ KENTAN



Pa erruas Jobig er skol evit ar wech kentañ, ne oa c'hoaz nemet c'hwec'h vloaz.

Edo pell e di diouz ar skol. Sebezet e chomas ar paotrig dirak ar skolaer. Ne oa ket drouk evel ma krede gantañ diagent.

Eur bugel, bihan eveltañ, a lammas davetañ, a sachas war e fri hag a c'hoarzas : « Setu amañ, avat » eme Jobig d'ar skolaer, « eur bugel fentus ! Heñvel eo ouz va dañvad Gwennig : lammat ha begeliat a ra eveltañ. » Ha Jobig da c'hoarzin ivez.

Goude-se, e voe kaset Jobig en eun ti bihan anvet « klas ». Gwelout a reas taolennou livek war ar mogerioù hag eun daolenn-du en eur c'horn. Ar mestr a lavaras neuze ar gerioù-mañ : « Jobig a zo eur paotr habask ha seven; ret eo karout Jobig ! »

War-lerc'h-se e krogas ar c'hlas.

Ar menozioù

Pet vloaz e oa Jobig pa erruas er skol ?
 Penaos e oa ar mestr ?
 Petra a reas eur bugel bihan ?
 Pelec'h e voe kaset Jobig ?
 Petra a lavaras ar mestr ?

Geriadur

Ar c'hlas : ar voger; an daolenn-du; an armel-levrioù; ar bank; al levr; ar c'haier; ar reolenn; an doug-pluenn; ar c'homenn; ar c'hreion; ar c'horn-liw; ar paper-splu; ar c'helc'hier; ar skouer.

Verbou : Skrivañ, tresañ, kontañ, niveriñ, lenn, selaou, respont.

Kemmadurioù

Gwech : eur wech; diw wech; teir gwech; a-wechou.

Moger : eur voger; diw voger; ar mogerioù.

Taolenn : eun daolenn; diw daolenn; teir zaolenn; an taolennou.

Yezadur

Al lizereneg : a, b, k, d, e, f, g, gn, h, ch, c'h, i, y, j, l, lh, m, n, o, p, r, s, t, u, v, w, z.

Vogalennou : a, e, i, o, u, y.

Kensonennou : b, l, s... z.

Displegadur : Bezañ

Doare-diskleriañ

Amzer-vremañ	Amzer-da-zont	Amzer-amdremenet	Amzer-dremenet-striz
me a zo	me a vo	me a oa	me a voe
te a zo	te a vo	te a oa	te a voe
eñ (hi) a zo	eñ (hi) a vo	eñ (hi) a oa	eñ (hi) a voe
ni a zo	ni a vo	ni a oa	ni a voe
c'hwi a zo	c'hwi a vo	c'hwi a oa	c'hwi a voe
(i) int a zo	(i) int a vo	(i) int a oa	(i) int a voe

Poelladennou

1. Petra a welit er c'hlas ? Petra a reer er c'hlas ?
2. Skrivid gerioù enno ar gensonenn : c'h (e derou ar ger; e-kreiz ar ger; e dibenn ar ger).
3. Displegit ar verb : bezañ poellek.
4. Adaozañ ar frazennoù da heul gant eo e-lec'h a zo :
 Jobig a zo sebezet. Ar bugel a zo heñvel ouz eun dañvad.
 Jobig a zo eur paotr habask. Ar mogerioù a zo gwenn. An taolennou a zo brao.

AN AVAL



Daro eo an avalou. Ar bluskenn a zo melen-plouz ha ruz-tan. Paolig en deus c'hoant bras da laerez an aval brao a zo a-us d'e benn.

Aon en deus rak perc'henn an ti a zo du-hont, nepell diouz an ti-annez. N'eus forz ! Krapañ a ra Paolig er wezenn. Mont a ra war ar skourr moan hag eeun m'emañ an aval prizius a-istribilh outañ. Astenn a ra ar paotrig bizied krenus ha dinerzet gant ar spont hag ar morc'hed. Sellout a ra hep paouez, ouz perc'henn al liorz, ahont, e-kichen ar puñs. Brasaat a ra e spouron muioc'h-mui. Eur strivadenn c'hoaz, ha setu an dornig war an aval ruz ha melen. Petra eo serriñ ar bizied bremañ ? Netra evel just, evit eur bugel dinec'h. Siwaz ! Paolig n'eo ket fur. Seizet gant an aon, setu, en eun taol, al laerig o kouezañ war ar geot gleb.

A-us d'e benn, emañ an aval koant o vranskellat hag o c'hoarzin outañ.

Ar menozioù

Penaos eo kustum da vezañ eun aval daro ?
 Petra a ra Paolig ?
 Ha sioul eo e spered ? perak ?
 Ha gallout a ra kemer an aval ?
 Petra a c'hoarvez gantañ ?

Geriadur

Eun avaleñ : eun aval; ar plusk, ar bluskenn; ar vouedenn (boued); ar splus, eur splusenn.

Ar sistr : ar malouer; ar wask (gwask); an dourenn; ar penton; ar varrikenn; ar fust.

Verbou : Malañ, gwaskañ, naetaat, dibluskañ.

Kemmadurioù

Gwez (eur wezenn); ar morc'hed (eur vorc'hedenn); eur bugel (ar vugale); eun taol dorn (eun daol goad); e benn (penn); e vamm (mamm); e vreur (breur).

Yezadur

An ano : an ano a zo eur ger a verk eun *den*, eul *loen*, pe eun *dra*.

Paolig, bugel, aval, ki, a zo *anoioù*.

Displegadur : Kaout (endevoud)


<i>Amzer-bremañ</i>	<i>Amzer-da-zont</i>	<i>Amzer- amdremenet</i>	<i>Amzer- dremenet-striz</i>
me am eus	me am bo	me am boa	me am boe
te ac'h eus	te az po	te az poa	te az poe
eñ en deus	eñ en devo	eñ en doa	eñ en doe
hi he deus	hi he devo	hi he doa	hi he doe
ni hon eus	ni hor bo	ni hor boa	ni hor boe
c'hwi hoc'h eus	c'hwi ho po	c'hwi ho poa	c'hwi ho poe
(i) int o deus	(i) int o devo	(i) int o doa	(i) int o doe

Poelladennou

1. Lavarit penaos e vez graet ar sistr.
2. Skrivit holl anoioù al lennadenn.
3. Displegit ar verb : *kaout naon*.
4. Lakait er furm nac'hañ :

Daro eo an avalou. Ar bluskenn a zo melen. Krapañ a ra Paolig er wezenn. Brasaat a ra e spouron. Sellout a ra, Aon en deus.

PENNDU



Gwelet em eus, hizio, va marc'h karet, Penndu, o sachañ start war an arar sanket don en douar.

Eun eonenn wenn a ruilhe war al loen kreñv ha kalonek. N'eo ket ar skourjez eo a laka Penndu da labourat tenn evel-se. Nann. Kompren a ra, abaoe pell amzer, dever eul loen-stag en eur vereuri. Penndu a zo kamalad d'al labourer ha mignon d'ar maeziou.

Eürus eo er parkeier, e-touez ar gouerien. Digeriñ a ra gant nerz kroc'hen kalet ar douar; an ero, war e lerc'h, a ya eeun ha don betek bevenn ar park.

Prestik e vo hadet an ed; a-benn an hañv e roy dimp gwiniz fonnus ha bara saourus.

Penndu a hañval kompren an dra-se pa sach diehan war an arar pounner.

Ar menozioù

Peseurt loen eo Penndu ?
 Petra a ra Penndu ?
 Da biw eo kamalad ?
 Ha plijout a ra e labour dezañ ?
 Penaos e ra e labour ?
 Petra a roy an douar ?

Geriadur

Al labour douar : an arar, ar soc'h, ar gontell, an oged, ar ruilhenn, ar bigell.

An ed : (eun edenn); gwiniz (eur winizenn); heiz (eun heizenn); kerc'h (eur gerc'henn); segal (eur segalenn).

Verbou : Gounit, arat, ruilhal, hadañ.

Kemmadurioù

Eon gwenn (eun eonenn wenn); eur mignon (eur vignonez); eur c'houer (kouer); ar gouerien; va marc'h; va zad (tad); va fenn (penn); va c'hi (ki).

Yezadur

An ano : ar reiz.

Gourel : eur marc'h; eun arar; eul loen.

Gwregel : eun eonenn; an amzer; ar vereuri.

Displegadur : Hadañ

<i>Amzer-premañ</i>	<i>Amzer-da-zont</i>	<i>Amdremenet</i>	<i>Tremenet-striz</i>
me a had	me a hado	me a hade	me a hadas
te a had	te a hado	te a hade	te a hadas
eñ (hi) a had	eñ (hi) a hado	eñ (hi) a hade	eñ (hi) a hadas
ni a had	ni a hado	ni a hade	ni a hadas
c'hwi a had	c'hwi a hado	c'hwi a hade	c'hwi a hadas
int a had	int a hado	int a hade	int a hadas

Poelladennou

1. Lavarit penaos e vez aozet an *douar*.
2. Skrivit *anoioù* al lennadenn ha menegit ar reiz.
3. Displegit ar verb : *labourat er park*.
4. Lakait er furm diberson :
 Gwelet em eus, Kompren a ra, Eürus eo, Digeriñ a ra,
 Glevout a rez, Kerzout a reomp, Skrivañ a reont.

AR CHASEOUR



Klevet en deus Yannig, eun tenn fuzuilh. Emaomp e miz gwengolo hag an hemolc'h a zo digor.

Gwelout a ra, ar paotrig, eur vogedenn wenn a-zioc'h d'ar park bras, e-kichen an ti-soul, du-hont.

Piw eta en deus tennet ? Piw eo an hemolc'her-se ? Mont a ra Yannig etrezek ar park bras.

Trumm, e klev trouz war an tu kleiz e-touez ar raden; ha « yao », setu gad koz al lanneg rouz, anavezet mat gant ar chaseourien, o redek dirazañ a lammou hir hag uhel.

Bremañ e'sell Yannig er park. Gwelout a ra neuze eun arvest poanius-meurbet : e-kichen eun hemolc'her glac'haret, emañ, gourvezet ha leun-wad, ki bihan eun amezeg da Yannig; ar paour kaez loen a zo bet lazet gant an hemolc'her end-eeun.

Yannig ne c'hoarz ket; truez en deus, muioc'h, marteze ouz an den, eget ouz al loen. Ha, koulskoude, pebez tennier fall a zo dirazañ ! Pebez chaseour diampart !

Ar menozioù

Petra a glev Yannig, eun devez ?
 Petra a wel o tflukañ en e gichen ?
 Piw a wel goude er park ?
 Petra a zo e-kichen an hemolc'her ?
 Petra a zo bet c'hoarvezet ?
 Ouz piw en deus Yannig truez ? Perak ?

Geriadur

An hemolc'h : eun hemolc'her; ar chase, eur chaseour; eur fuzuilh, eun tenn, ar jiboez; gad (gedon), eur c'had; eur c'honikl (konikl); eur gudon (kudon); eur c'hefeleg (kefeleg); eun douryar; eur glujar (klujar-klujiri).

Verbou : Hemolc'hiñ, chaseal, bizañ, bukañ, tennañ, tizout, c'hwitañ.

Kemmadurioù

Ar moged (eur vogedenn); eun tenn (daou denn, tri zenn); eur c'hi; eun den; tud (an dud).

Yezadur

An ano : an niver.

Unander : eun tenn, eur park, eun amezeg.

Liester : lammou, chaseourien.

Displegadur : Mont

<i>Amzer-vremañ</i>	<i>Amzer-da-zont</i>	<i>Andremenet</i>	<i>Tremenet-striz</i>
me a ya	me a yelo	me a yae	me a yeas
te a ya	te a yelo	te a yae	te a yeas
eñ (hi) a ya	eñ (hi) a yelo	eñ (hi) a yae	eñ (hi) a yeas
ni a ya	ni a yelo	ni a yae	ni a yeas
c'hwí a ya	c'hwí a yelo	c'hwí a yae	c'hwí a yeas
int a ya	int a yelo	int a yae	int a yeas

Poelladennou

1. Displegit devez eur *chaseour*.
2. Skrivit *liester* anoioù al lennadenn.
3. Displegit ar verb : *mont da vale*.
4. Echuiñ ar frazennoù-mañ :
 Me a..., Paol a zo bet..., Gwelout a ran...
 ...he deus gouelet. ...o deus c'hoarzet. Mont a ran...

AR GOANV



Glaod a ra bemdez abaoe eur miz. Janig a zo bet hizio er skol. Gleb teil eo he dilhad.

Ware'hoaz, diriaou, avat, e chomo Janig gant he mamm da labourat en ti. Er-maez, war an hentou, ez eus fank e-leiz hag, ivez, poullou dour don ha lous. An avel a c'hwez kreñv ha dibaouez er gwez. Kouezet eo an deliou; ar barrou noaz a zo hejet dalc'hmat gant nerz ha kounnar.

Tri miz beñnak e pado an amzer fall-se. Janig a chomo bemnoz e-kichen an tan pa vo echu he labour skol.

He mamm a gonto dezi neuze marvailhou a bep seurt a-raok mont da gousket.

Ne zisplij ket re ar goañv d'ar plac'hig.

Ar menozioù

Penaos eo deut Janig diouz ar skol ?
 Petra a ray warc'hoaz ?
 Penaos eo an amzer ? ar gwez ?
 Pegeit e pado an amzer-se ?
 Petra a ray Janig e-pad ar goañv ?

Geriadur

Ar goañv : ar glao, an erc'h, ar skorn, ar grizilh (kazarc'h), ar sklas, an arne, ar gorventenn, eur barrad-amzer.
Skol : skolaer, skolaerez, skoliad (skolidi), skolaj, skol-etre; skoliañ.

Kemmadurioù

He dilhad : he mamm, he zad, he fenn, he c'haz.
Da gousket : da vale, da welout, da glask.
Ne zisplij ket : ne gemer ket, ne ouel ket.

Yezadur

Ar ger-mell : Ar ger-mañ a vez lakaet dirak eun ano.
Resis : ar goanv; an hentou; al labour.
Amresis : eur miz; eun hent; eul labour.


Displegadur : Gouzout

<i>Bremañ</i>	<i>Da-zont</i>	<i>Andremenet</i>	<i>Tremenet-striz</i>
me a oar	me a ouezo	me a ouie	me a ouezas
te a oar	te a ouezo	te a ouie	te a ouezas
eñ (hi) a oar	eñ (hi) a ouezo	eñ (hi) a ouie	eñ (hi) a ouezas
ni a oar	ni a ouezo	ni a ouie	ni a ouezas
c'hwi a oar	c'hwi a ouezo	c'hwi a ouie	c'hwi a ouezas
(i) int a oar	(i) int a ouezo	(i) int a ouie	(i) int a ouezas

Poelladennou

1. Komzit diwar-benn ar *goañv*.
2. Lakait eur *ger-mell* dirak an anoiou-mañ : tad, mab, levr, evn, heol, mamm, den.
3. Displegit ar verb : *gouzout ar gentel*.
4. Lakait er c'hentañ gour, unander :
 Eur c'hreioñ he deus. Kemer a ra ar bluenn. Skrivañ a reomp. Naon hoc'h eus. Lenn a rit. Mont a reont.

KOUIGNIQUA !



Julig a zo savet abred. N'en deus ket ankounac'haet emañ hizio deiz ar c'houignou.

Mont a ra da gerc'hat e gamaladed; ha setu int en hent. Stekiñ a réont ouz dor holl diez ar vourc'h, o kanañ : « Kouignaoua ! Kouignipi !... Kouignaoua ! Kouignipi ! »

An Itron Flem a ro eur pezh daou wenneg da bep hini. Yann, ar c'hemener, a gemer madigoù en eur voest hag a laka pemp anezo e pep dorn astennet.

Janig koz, avat, n'eo ket gwall vrokus; paour eo, e gwirionez.

« Setu amañ », emezi, « eun tamm gwastell a ingalot kenetrezoc'h ! »

Sachañ a ra bremañ ar vugale war gordenn-gloc'h eun ti pinvidik : « Ac'han ! C'hwi eo, paotred ! deuit tre, va mignoned ! » eme an dimezell goz. « Piv a zo aze ganeoc'h ? Am eus aon ez eo Julig, mab an toer. Er-maez, kanfard ! Er maez ! ha diouztu ! Me ho tesko da sachañ war va c'hordennig-kloc'h bemdez, hep abeg ebet ! Er-maez ! »

Julig a stou e benn gant ar vez hag a c'hortoz e geneiled. Eur pred eus an dibab o deus debret ar re-mañ.

Goude-se e kendale'hont gant o haleadenn, o kanañ dalc'hmat : « Kouignaoua ! kouignipi ! ».

Ar menozioù

Pegoulz emañ deiz ar c'houignaoua ?
 Petra a ra ar vugale ?
 Petra a zo bet roet dezo ?
 Petra a c'hoarvez gant Julig ?
 Ha kenderc'hel a ra gant e geneiled ?

Geriadur

Kontrol : abred (diwezat); kamalad (enebour) kemer (reiñ); koz (yaouank); brokus (piz); sachañ (bountañ); pinvidik (paour); er-maez (e-barz); diouztu (goude); sevel (diskenn); kenderc'hel (paouez).

Kemmadurioù

Dor (an nor; an doriou); gwall vrokus (brokus); gwall-zarvoud (darvoud); gwallgaset (kas); ar wastell (gwastell).

Yezadur

An *ano-gwan* : Implijet e vez evit klokaat ster an ano.
 Eun den *mat*; *dek* gwenneg; *ho* preur, eun dra *bennak*.
 Brokus, pemp, pinvidik, va, a zo *anoù-gwan*.


Displegadur : Ober

Bremañ	Da-zont	Amdremenet	Tremenet-striz
me a ra	me a ray	me a rae	me a reas
te a ra	te a ray	te a rae	te a reas
eñ (hi) a ra	eñ (hi) a ray	eñ (hi) a rae	eñ (hi) a reas
ni a ra	ni a ray	ni a rae	ni a reas
c'hwi a ra	c'hwi a ray	c'hwi a rae	c'hwi a reas
(i) int a ra	int a ray	int a rae	int a reas.

Poelladennou

- Petra a blijfe deoc'h kaout d'ho kouignaoua ? Perak ?
- Stagit eun *ano-gwan* ouz an anoù da heul : ...levr; eun oabl...; eun ti...; eun den...; eur bugel...; ...real; eun daolenn...; eur vleunienn...; eur c'hi...
- Displegit ar verb : *ober tan*.
- Lakait en amzer-vremañ (doare diskleriañ) :
 Skrivet em eus. N'hoc'h eus ket lennet. Tapet en deus poan. N'o deus ket echuet. Gwelef he deus. N'hon eus ket c'hoarzet.

WAR AR SKORN



Skornet eo dour ar poull e-tal porz ar skol. Kalz a joa a zo e-touez ar skolidi. Lakaet eo bet al levriou hag ar chupennoù war ribl ar redenn. Per eo an hini ampartañ da risklañ hep mont d'an traonñ; ruzañ a ra betek penn pellañ ar skorn. Jobig a ya ivez braoik a-walc'h; kluchañ a ra a-wechou. Yann, eñ, en deus uzet an hanter eus soliou e votou abaoe dec'h. Trouz en devo fenez.

Ha setu bremañ Loeiz e lanchenn hir : « Me » eme Loeiz, « a zo barrek d'ober eur pezh lamm war ar skorn ha da risklañ e-pad eur munud hep ehanañ ! — Ac'hanta ! » eme ar re all « kae'ta ! »

Ha Loeiz o kemer e lañs. Siwaz ! n'eo ket teo a-walc'h ar skorn; terriñ a ra dindan pouez Loeiz !

Hemañ a sank neuze, en eun taol, betek strad ar poull. Met sachet eo buan gant e vignoned eus an dour lous.

N'eo ket koant ar brabañser. Goloet eo gant fank, penn-kil-ha-troad.

Ar menozioù

Penaos eo ar poull dour ?
 Petra a ra ar skolidi ?
 Piv eo an ampartañ ? perak ?
 Penaos e ruz Jobig ?
 Petra a c'hoarvez gant Loeiz ?
 Petra a ra e geneiled ?

Geriadur

Eur poull-dour : eur poullad; eur poull-bez; ar poull-kalon; eur poull-kannañ; eur poull-rod; eur poull-tro.
Dour : douriou; doureier; दौराण; dour-bil; dourek; dourenn; dour-gliz; dourgi.

Kemmadurioù

Eur mignon : eur vignoned; mignoned; ar vignoned; mignonezed; ar mignonezed.
Ar brabañser : brabañserien; ar vrabañserien.

Yezadur

An ano-gwan doareañ : eur bugel ampart; eul levr brao; eur poull don; an dour lous.
Ar ger-mañ a ro'eur perz d'an ano : Peuvuiañ e vez lakaet war-lerc'h an ano.

Displegadur : Bezañ

Doare diskleriañ : furm bersorel

Bremañ	Da-zont	Amdremenet	Tremenet-striz
Bras on	Bras e viñ	koant e oan	koant e voen
— out	— e vi	— e oas	— e voes
— eo	— e vo	— e oa	— e voe
— omp	— e vimp	— e oamp	— e voemp
— oc'h	— e viot	— e oac'h	— e voec'h
— int	— e vint	— e oant	— e voent

Poelladennoù

1. Displegit ho plijadurioù e-pad ar *goañv*.
2. Skrivit kontrol an anoù-gwan da heul : bras, teo, uhel, koant, ledan, hir, poellek.
3. Displegit ar verb : *bezañ fur* (en diw furm).
4. Lakait en trede gour, liester :
 Lakaat a ra e dog. Troc'het en deus e vleo. Ne garomp ket ar glao. Skrivet em eus eul lizer. Klevout a rit ar c'hloc'h. Ne c'hoarvez ket gant ar c'hi.

AR BOULOM ERC'H



Abaoc pemzek deiz ez eus erc'h war an douar.

Mont a ra Yann d'ar skol; paket tomm eo rak yenaat a ra an amzer bemdez.

O treuziñ plasenn ar marc'had, e wel keneiled o c'hoari gant an erc'h. Graet o deus eur boulom uhel. Dougen a ra hemañ eur skubellenn hag eun tog houara. Eur pikol korn-butun a zo sanket en e c'henou.

Ha setu an holl o skeiñ boullou erc'h gant an den gwenn ha fentus.

Yann a sell, nemetken. « Erru out, Yannig ? » eme Loeiz « Nann ! » a respont ar paotrig « re yen eo ! — Gwaz-a-se evidout neuze, bugel tener ! » Ha Loeiz o redek war lerc'h Yann hag o stlepel boullou erc'h gantan. Yann a red, a red ! Riw en doa da gentan; bremañ, avat, en deus tomm. Hag eñ ha kemer erc'h evel ar re all; e stummañ a ra e-giz boullouigou ha c'hoari gant e geneiled a-laz-korf.

Eur sutelladenn a laka an abadenn da echuiñ. Poent eo mont da skrivañ poelladennou ha da studiañ kente-
liou nevez.

Ar menozioù

Penaos eo an amzer ?
Petra o deus graet keneiled Yann ?
Petra a ra Yann, hepken ?
Petra a ra Loeiz neuze ?
Ha tomm en deus Yann a benn ar fin ? perak ?
Penaos ez echu ar c'hoari ?

Geriadur

Yenaat : tonmaat, brasaat, kreñvaat, moanaat.

Pemzek : unan, dek, daouzek, iriwec'h, ugent, daou-ha-tregont; kant-hanter-kant...

Deiz : devez; noz; nozvez; abardaez; abardaevez; beure, beurevez; endervez.

Kemmadurioù

O treuziñ : o tapout; o kemer, o prenañ; o welout; o vont; o vevañ; o tont.

e wel : e teu; e vev; e kemer; e tap; e pren.

Yezadur

An ano-gwan perc'hennañ : Diskouez a ra da biw eo an den, al loen pe an dra.

Va zad; *da dad*; *e dad*; *hon tad*; *hor mamm*; *ho preur*; *hoc'h ene*; *o zad*; *o mamm*.

Displegadur : Hadañ

Furm bersonel

Bremañ	Da-zont	Amdremenet	Tremenet-striz
Neuze e hadan	Neuze e hadin	Neuze e haden	Neuze e hadis
— e hadez	— e hadi	— e hades	— e hadjout
— e had	— e hado	— e hade	— e hadas
— e hadomp	— e hadimp	— e hademp	— e hadjomp
— e hadit	— e hadot	— e hadec'h	— e hadjoe'h
— e hadout	— e hadint	— e hadent	— e hadjont

Poelladennou

1. Lavarit penaos e rafec'h eur boulom erc'h.
2. Lakait eun ano-gwan perc'hennañ dirak an anoiou da heul : ki-paner, ti, gwele, breur, moereb.
3. Displegit ar verb : *kemer poan* (diw furm).
4. Lakait ar ger ret e lec'h ar pikou :
Va breur a zo ken... ha me. Va c'hoar a zo... eget he c'henderv.
Va levr a zo ken... ha da hini. Da vleo a zo... eget va re.

E KORN AN OALD



Yen eo er--maez; an avel a c'hwez er pin en-dro d'an ti. Emañ Job koz o kontañ marvailhou d'e amezcien dostañ.

Bemnoz, abaoe bloaveziou, e teu evel-se, gant kontadennou kaer, danevellou burzudus ha divizou iskis.

Ar flamm ruz a luc'h a-hed moger du ar siminal; ar moked a sav, en toull don ha teñval gant fulennou niverus ha lugernus. Pep unan a souch ouz e amezeg, rak bihan eo an oaled, ha bras an aon, a-wechou. Dour a zo bet lakaet war an tan ha, bremaik, p'en devo echu Job, e vo graet kafe mat. Loeiz bihan a zo manet kousket war varlenn e vamm.

Huñvreoù a ra, moarvat, hag e spered a ya en-dro e pep lec'h m'en deus e gaset Job war eskell e faltazi.

Er-maez e sko ar glao ouz ar stalafiou; an avel a yud dalc'hmat er pin en-dro d'an ti.

Nag a blijadur bezañ er gwasked e-kichen eun oaled ken degemerus !

Ar menozioù

Peseurt amzer a ra ?
 Petra a ra Job koz ?
 Penaos e ra an tan ?
 Petra a vo evet bremaik ?
 Petra en deus graet Loeiz ?
 Ha brao eo bezañ e-kichen an oaled ? perak ?

Geriadur

An oaled : ar siminal; an huzil; an drezenn; al landeriu; ar vegin; ar baliked; ar piñsetez; an eteo (etevien pe etivi); ar fulennou.

Verbou : Kregiñ, c'hwezañ, fourgasiñ an tan.

Kemmadurioù

War varlenn : war-bouez; war varc'h; war-dro; war-draoñ; war-du; war-gil; war-grec'h; war-c'horre.

Eur blijadur vras; eur gontadenn gaer; eur voger du; eur vamm vat; eun avel domm.

Yezadur

An ano-gwan diskouezañ : an dra-mañ :
 Diskouez a ra pelec'h emañ an den, al loen pe an dra.
 An ti-mañ; an den-se; an ti-hont.

Displegadur : Mont

Furm bersonel			
Bremañ	Da-zont	Amdremenet	Tremenet-striz
Buan ez an	Buan ez in	Buan ez aen	Buan ez is
— ez ez	— ez i	— ez aes	— ez ejout
— ez a	— ez ay	— ez ae	— ez eas
— ez eomp	— ez aimp	— ez aemp	— ez ejomp
— ez it	— ez eot	— ez aec'h	— ez ejoc'h
— ez eont	— ez aint	— ez aent	— ez ejont

Poelladennou

- Petra a vez graet, du-se, war an oaled, pe en-dro dezi.
- Lakait a-gevret an anoioù hag an anoioù-gwan da heul, gant harp eur ger-mell : dra (mat); oaled (bras); plac'h (koant); merc'hodenn (kaer); plijadur (gwir); bleunienn (melen).
- Displegit ar verb : mont war droad (diw furm).
- Lakait ar ger rei e lec'h ar pikou :
 Hizio ez eo... an amzer. An tan a vez kroget war an... Mont a ra ar moked dre ar... An... a vez lakaet dindan ar gastelodenn. Stouvet e vez ar prenester gant...

AR MARC'H HOUARN



Loeiz a zo mab d'eun den pinvidik. Eur marc'h-houarn a zo bet prenet dezañ, unan glas ha koant-kenañ.

Desket en deus buan mont warnañ. Avi a ra d'e gamaladed.

Asantiñ a ra Loeiz prestañ e venveg dezo; pep hini d'e dro a ray eun taol-esa. Yann a bign da gentañ; met n'hell ket ober gant an troadikellou; ret eo e vountañ penna-da-benn.

Jobig, eñ, a zo barrekoc'h; gallout a ra ober pemp gwech tro ar blasenn.

Da Julig eo bremañ; hemañ, avat, ne oar tamm ebet an tu d'en em gemer. N'eus forz! Azezañ a ra war an dibr ha kregiñ start en dornellou; neuze, e dreid a bep eil d'an douar, e vount hag ez a war-raok. Erru eo e penn eur c'hrec'h. « An diskenn, am eus aon, a vo plijus-meurbet! » a soñj Julig. Hag eñ war-draoñ, gorrek da gentañ ha neuze buanoc'h-buanañ; kemer a ra tiz muioc'h-mui; stad a zo ennañ.

Siwaz eur bagad deñved a dreuz an hent dirazañ; n'eo ket evit ober gant ar starderez. Stekiñ a ra ouz eun oanig koant; hag o-daou war ruilh er boultrenn.

Pa sav ar paotrig, ez eo aet an deñved kuit; ar marc'h-houarn a zo flastret ha dilhad ar bugel a zo freget penna-da-benn.

C'hoarzin goap a ra e genciled outañ e beg ar c'hrec'h.

Ar menozioù

Petra a zo bet prenet da Loeiz ?
 Penaos e ra plijadur d'e gamaladed ?
 Petra a c'hoarvez gant Julig ?
 Petra a ra e genciled ?

Geriadur

Ar marc'h-houarn : ar framm; an dibr; ar sturier; an dornellou; ar rodou; eur gammed; an emprennou; eur wezegell; an troadikellou; ar rodou-dentek; ar chadenn; ar starderez; ar grizilhon; ar c'hwezerezh.

Koant-kenañ : brao-meurbet; kaer-dreist; mat-mat; bras-tre.

Kemmadurioù

E venveg (benveg); e gamaladed (kamaladed); e dro (tro); a bign (pignal); e vountañ (bountañ); penna-da-benn; ar blasenn (plasenn); eur plas; en em gemer; en em wiskañ; en em zrailhañ :

War-draoñ ; da gentañ; da c'houde; da glask; er boultrenn.

Yezadur

An ano-gwan niveriñ :

Diskouez : a ra niver an dud, al loened pe an traou hag ivez plas pep hini.

Unan, tri, dek, kant, mil...

Ar c'hentañ den; an eil gwech; an trede hent; ar pevarc bugel; ar deket bloaz; an ugentvet deiz-ha-bloaz.

Displegadur : Gouzout

Furm bersotel

Bremañ	Da-zont	Andremenet	Tremenet-striz
Kement-se a ouzon	— a ouezin	— a ouien	— a ouezis
— a ouzout	— a ouezi	— a ouies	— a ouejout
— a oar	— a ouezo	— a ouie	— a ouezas
— a ouzomp	— a ouezimp	— a ouieimp	— a ouejomp
— a ouzoc'h	— a ouiot	— a ouiec'h	— a oujoc'h
— a ouzont	— a ouezint	— a ouient	— a ouejont

Poelladennou

1. Lavarit penaos e pignit war ho marc'h-houarn.
2. Lakait an anoiou-gwan niveriñ-mañ (*daou, tri, pevar, nao*) dirak an anoiou da heul : kilometr, bloaz, paner, tamm.
3. Displegit ar verb : *gouzout kanañ* (diw furm).
4. Ober eur frazenn gant pep ger da heul : troadikellou, dibr, dornellou, rodou, starderez, chadenn.

AN NEVEZ AMZER



Savet eo an heol abretoc'h eun tamm eget dec'h ha diwezatoc'h, moarvat, eget warc'hoaz. Kelc'h alaouret hor mignon feal a lugern sklaeroc'h-sklaerañ bemdez.

Ar seo pinvidik ha magus en em sil e-kreiz al louzou, tener hag ar gwez bras. An deliou, kurunenn gwer an natur, a laka levez ha fiziañs er c'halonou hag er speredou.

Kuzet e-touez ar geot, ar bleuniou-nevez, melen ha glan, a ra sin d'o mignoned. Deut eo ar c'houlz da zispakañ braoigou ar pradeier hag ar c'hleuziou. Hini hag hini, pennou bihan ha koant a sav, izelek ha fur, war al leton glas-gwer. Al laboused, o richanañ, o salud gant kalz a garantez.

Trouz ar stêr, fuloret er goañv, a zo tavet. Hiboudiñ a ra bremañ a-unan gant an evned.

A-hed he riblou sioul e hañval al loened bezañ mignoned e-pad eur pennadig.

O ! burzud an nevez-amzer !

Ar menozioù

Penaos e sav an heol en nevez-amzer ?
 Pehaos eo an natur ?
 Petra a ra ar bleuniou ? al laboused ?
 Penaos eo ar stêr ?
 Petra a sonjit diwar-benn an nevez-amzer ?

Geriadur

An nevez-amzer : au hañv; an diskar-amzer; ar goañv.
Abretoc'h : skañvoc'h; kreñvoc'h; bihanoc'h.
An abretañ ar gwellañ : an amzer dommañ; an den brasañ; ar wezenn uhelañ.
Sklaeroc'h-sklaerañ : tommoc'h-tommañ; brasoc'h-brasañ; diaesoc'h-diaesañ.

Kemmadurioù

Er c'halonou : kalon; ar galon; ar c'halonou.
Ar c'hleuzioù : kleuz; ar c'hleuz.
Kalz a garantez : kalz a dud; kalz a drouz.

Yezadur

An ano-gwan damziskouezañ :
 Ar ger-mañ n'eo ket resis mat e-keñver an ano.
 Eur wech *bennak*, an *holl* dud; *pep* ti; ti *ebet*; eur paotr *all*; an *hevelep* tra.

Displegadur : Ober

Furm bersonel

Bremañ	Da-zont	Amdremenet	Tremenet-striz
Trouz a ran	Trouz a rin	Trouz a raen	Trouz a ris
— rez	— ri	— raes	— rejout
— ra	— ray	— rae	— reas
— reomp	— raimp	— raemp	— rejomp
— rit	— reot	— raec'h	— rejoc'h
— reont	— raint	— raent	— rejont

Poelladennoù

1. Petra a blij deoc'h e-kerz an nevez-amzer ?
2. Peurechuit ar gerioù da heul :
 Hizio eo brao an amzer; warc'hoaz e vo *brav...* c'hoaz.
 Paolig eo ar bugel *kreñv...* eus e glas. Ar gontell a zo *moanoc'h...* bemdez. An hini gwell... eo an hini *fur...* An... ar gwellañ.
3. Displegit ar verb : *Ober eus e wellañ* (diw furm).
4. Lakañ al lennadenn en amzer da-zont.

AN EVNED



Pebez krouadur koant eo al labousig ! Nijal ha piltrotat a ra adalek ar beure betek an noz da glask e voued. Kanañ a ra alies war doenn an tiez pe war skourrou ar gwez.

An alc'houeder a nij pell amzer, uhel ha sonn en oabl, o richanañ dibaouez gant eur vouez koantik ha skiltrus. Diaes eo gwelout an evnig.

Ar golvan a chom dalc'hmat e-kichen an tiez; graet en deus e neiz dindan an doenn, en eun toull don. Laer ha hardis eo.

Al laouenanig a ra e neiz e mogerioù douar ar gwenodennou don. Dozviñ a ra eun niver bras a viou bihan brizellek; koantik-kenañ eo an evnig-se.

Ar pinted gwidreus a oar kuzat o re vihan e-kreiz ar bodou spenn pe an ilio stank.

E-keit ha m'emañ an dubeed o c'hrougousat, ar pennglaou hag ar pabor a laka o gwiskamant liesliw da skediñ en heol.

Ne vez graet van ebet ouz ar big, ar gegin pe ar vran; re alies e vezont gwelet ha klevet e-pad ar wall-amzer.

Ar menozioù

Petra a ra al labous a-hed an deiz ?
 Petra a ra an alc'houeder ? ar golvan ?
 al laouenanig ? ar pinted ? an dubeed ?
 Ouz pe laboused ne vez ken graet van ?
 perak ?

Geriadur

Al labousig : ar paotrig; ar c'hoadig; al loenig.
Dibaouez : (paouez); digar (karout); didruez (truez); dibenn (penn); dizereat (dereat).
Koantik : braoik; dousik; buanik.
Alc'houeder : laboused, pinted; laouenaned; dubeed; pabored; golvaned pe : golveni.

Kemmadurioù

E voued : (boued); war doenn (toenn); eur vouez (monez); an doenn (toenn); o re vihan; ar re vras; ar re goant; eur re votou; ar vran (bran; ar brini); ar wall-amzer; eur wall-avel.

Yezadur

Ar ragano : ar ragano a zo eur ger hag a vez implijet e lec'h eun ano : va re, da re, o re.

Me; te; ni; int, hemañ; an hini; va hini; ar re-se; a zo raganoioù.

Displegadur : Bezañ

<i>Tremenet-amstriz</i>	<i>Da-zont-kent</i>	<i>Peurdremenet</i>	<i>Tremenet-kent</i>
me a zo bet	me a vo bet	me a oa bet	me a voe bet
te a zo bet	te a vo bet	te a oa bet	te a voe bet
eñ(hi) a zo bet	eñ(hi) a vo bet	eñ(hi) a oa bet	eñ(hi) a voe bet
ni a zo bet	ni a vo bet	ni a oa bet	ni a voe bet
c'hwi a zo bet	c'hwi a vo bet	c'hwi a oa bet	c'hwi a voe bet
int a zo bet	int a vo bet	int a oa bet	int a voe bet

Poelladennou

1. Komzit diwar-benn an evned a anavezit.
2. Lakait e (perc'hennañ) ha va dirak ar gerioù-mañ : kaier, pluenn, gomenn, penn, mamm, tad, breur, ti.
3. Displegit ar verb : *Bezañ du-hont* en amzerioù dieeun.
4. Skrivit holl anioù gwregel al lennadenn.

AR BLEUNIOU



E-pad an nevez-amzer ez a alies Emil gant e dad war ar maez, dreist-holl goude koan, pa vez echu al labour. Plijout a ra d'ar bugelig kutuilh bleuniou war ribl an hentou.

Dastum a ra an troad-eboul, an dro-heol, ar vleunienn-nevez kavet amañ-du-hont. Ober a ra ganto eur boked brao, limestra, gwenn ha melen. Kas a ra neuze ar boked-se d'e c'hoar Janig.

Janig, laouen-kenañ, a laka ar boked koant en eur pod bihan gant dour sklaer war ar siminal.

Plijus eo gwelout ar bleuniou e-kichen poltredou tud an ti.

Alies e vez ret kemmañ ar bleuniou rak gweñviñ a reont buan.

Neuze ne vez ket pell Emil o vont war ar maez adarre evit ober plijadur d'e c'hoar.

Ar menozioù

Petra a ra Emil e-pad an nevez-amzer ?
 Peseurt bleuniou a gutuilh ?
 Petra a ra ganto ?
 Da biw e ro ar boked ?
 Pelec'h e vez lakaet ar boked ?
 Petra a ra Emil pa vez gweñvet ar bleuniou ?

Geriadur

Liesterioù : bleunienn (bleuniou); labouriou; bokedou; podou; siminaliou; ar maeziou; plijadurioù; c'hoar (c'hoarezed); bugel (bugale); ti (tiez).

Dreist-holl : dre-holl; an holl; en holl.

Kemmadurioù

Eur vleunienn; ar bleuniou; e dad (tad); ar goan (koan); eun dro (tro); o vont; o tont; an amzer vrao.

Yezadur

Ar ragano gour : Lakaet e vez e lec'h eun ano den :

Me, te, eñ, hi, ni, c'hwi, int.

Va digarezit ; *da* welout a ran; *hen* ober a rez; *e* dapout a reas; *hon* devññ a reas; *ho* kwelout a ris; *o* gwelout a reas.

Displegadur : Kaout (endevout)

<i>Tremenet-amstriz</i>	<i>Da-zont-kent</i>	<i>Peurdremenet</i>	<i>Tremenet-kent</i>
me am'eus bet	me am ho bet	me am boa bet	me am boe bet
te ac'h eus bet	te az po bet	te az poa bet	te az poe bet
eñ en deus bet	eñ en devo bet	eñ en doa bet	eñ en doe bet
hi he deus bet	hi he devo bet	hi he doa bet	hi he doe bet
ni hon'eus bet	ni hor bo bet	ni hor boa bet	ni hor boe bet
c'hwi hoc'h eus bet	c'hwi ho po bet	c'hwi ho poa bet	c'hwi ho poe bet
int o deus bet	int o devo bet	int o doa bet	int o doe bet

Poelladennou

1. Komzit diwar-benn ar bleuniou a anavezit.
2. Skrivit liester an anioù-mañ : den, paotr, kaier, kontell, troad, park, prad, loen, levr.
3. Displegit ar verb : *kaout naon*, en amzerioù dieunn.
4. Lakait al lennadenn en amzer amdremenet.

AR NEIZ



E-kreiz eur bod spern-gwenn o deus savet ar panted o neiz. Na koant eo al lochennig e-touez an deliou stank hag ar barrou rouestlet start !

Siwaz ! Bugale a zo deut nepell dioutañ. Jobig en deus gwelet an neiz. Strivañ a ra ar paotrig evit distar-dañ ar skourrou broudus.

A-us d'ar paotrig, e yud an evned; nijellañ a reont en-dro dezañ gant spont ha kounnar.

Paket eo an neiz. E-barz e wel Jobig pevar vi war an dum tomm ha flour.

Petra a ray bremañ ? Moarvat, diskouez an neiz d'ar re n'o deus kavet hini ebet. War e hent ez eo harzet Jobig gant eur vaouez koz: « Gwelout a ran, Jobig, petra ac'h eus graet. »

« Te ivez, paotrig, ac'h eus eun neiz du hont, e-tal ar skol; te ivez, a zo eul labous bihan. Ha petra a lavarfe da vammig ma vefe distrujet an ti koant ma loj ennañ ganit, Jobig ? »

Stouet eo bremañ penn ar bugelig. Distreiñ a ra d'ar bod spern da lakaat an neiz e-touez an deliou.

Ar panted o deus paouezet da yudal.

Ar menozioù

Pelec'h eo bet savet an neiz ?
 Piw en deus kavet an neiz !
 Petra a ra an evned ?
 Petra a ra Jobig ?
 Piw a gav war e hent ?
 Petra a lavar ar plac'h koz ?
 Petra a ra Jobig neuze ?

Geriadur

Kontrol : sevel (distrujañ); koant (divalo); stank (boull); rouestlet (dirouestlet); a-us (a-is); tomm (yen); flour (rust).

Gwelout : dont war wel; ober eur weladenn; eur gweladenn; eun dra diwelus; eur gweledva.

Kemmadurioù

Eur vaouez (maouez) koz; eur plac'h koz; eun itron goz.
 Da vammig; da vreur; da vele; da zent.

Yezadur

Ar ragano perc'hennañ : Diskouez a ra da biw eo an den, al loen pe an dra.

Roll : va hini; da hini; e hini; hec'h hini; hon hini; hoc'h hini; o hini; va re; da re; e re; he re; hor re; ho re; o re.

Displegadur : Hadañ

<i>Tremenet-amstriz</i>	<i>Da-zont-kent</i>	<i>Peurdremenet</i>	<i>Tremenet-kent</i>
me am eus hadet	me am bo hadet	me am boa hadet	me am boe hadet
te ac'h eus hadet	te az po hadet	te az poa hadet	te az poe hadet
eñ en deus hadet	eñ en devo hadet	eñ en doa hadet	eñ en doe hadet
hi he deus hadet	hi he devo hadet	hi he doa hadet	hi he doe hadet
ni hon eus hadet	ni hor bo hadet	ni hor boa hadet	ni hor boe hadet
e'hwí hoc'h eus hadet	e'hwí ho po hadet	e'hwí ho poa hadet	e'hwí ho poe hadet
int o deus hadet	int o devo hadet	int o doa hadet	int o doe hadet

Poelladennou

1. Lavarit penaos eo graet eun neiz pig, eun neiz gwennili; eun neiz moualc'h.
2. Skrivit kontrol ar gerioù da heul : buan, hir, kemer, teo, teñval.
3. Displegit ar verb : *kemer poan*, en amzerioù dieeun.
4. Skrivit anioù al lennadenn en niver kontrol.

AR PESK RUZ



Emañ Bilzig, ar c'haz, azezet war dumenn ar siminal, o sellout ouz ar pesk ruz e dour boull al lestrig gwer.

Na koant eo al loenig gant e skantou ruz, melen ha gwenn ! Pebez meuz dispar e vefe ma c'hellfe Bilzig e zilemel eus e c'houedor gleb ! Tostaat a ra ar c'haz e fri hag e vourrou ouz kostez al lestr; ar peskig ruz a bella raktal.

Neuze ez astenn Bilzig e bao dehou a-us d'an dour hag e laka e grabanou e-barz, goustadik-goustadik. E gwirionez n'eo ket plijus añ abadenn; sachañ a ra buan e bao gantañ.

Ar pesk, spouronet, a lamm evel eun diaoul en eur piñsin dour binniget.

Perig en deus truez muioc'h ouz ar c'haz eget ouz ar peck. Splujañ a ra e zornig el lestr. Ar pesk en em zifenn eus e wellañ. Siwaz ! Paket eo evelato.

Ar bugel a ro neuze ar pesk da Vilzig. Hemañ, e daou c'henaouad, a lonk al loenig kaez.

Neuze e c'hoanta Perig flourañ kein ar c'haz; met ar marlonk dianaoudek a ro eun taol pao d'ar bugel hag a ya kuit, o tufañ gant kounnar.

Ar menozioù

Pelec'h emañ ar c'haz ?
 Petra a ra Bilzig ?
 Petra a ra Perig ?
 Ha gallout a ra Perig flourañ ar c'haz ?
 Petra a sonjit diwar-benn Bilzig ? diwar-benn Perig ?

Geriadur

Ar pesked : eun dluzenn; eun eog; eur silienn; eur beked; eur garpenn; eur brell; eur blaisenn; eun harink; eur brezel; eur sardinenn.

Dluzed, eoged, siliou, karped, brelled, plais, harinked, brizili, sardined.

Ar walenn : al laz; an neud; ar reunenn; an higenn; ar boued; ar spoueenn.

Kemmadurioù

War dumenn (tumenn); ma c'hellfe (gallout), ma welfe (gwelout); ma karfe, ma tapfe, ma preufe; ma leufe (dont); e c'houedor (goudor); en em zifenn; en em lazañ.

Yezadur

Ar ragano, diskouezañ : Diskouez a ra pelec'h emañ an den, al loen pe an dra.

Hemañ, houmañ, hennez, hounnez, henhont, hounhont; ar re-mañ; ar re-se; ar re-hont; an dra-mañ; an dra-se.


Displegadur : Mont

<i>Tremenet-amstriz</i>	<i>Da-zont-kent</i>	<i>Peudremenet</i>	<i>Tremenet-kent</i>
me a zo aet	me a vo aet	me a oa aet	me a voe aet
te a zo aet	te a vo aet	te a oa aet	te a voe aet
eñ a zo aet	eñ a vo aet	eñ a oa aet	eñ a voe aet
hi a zo aet	hi a vo aet	hi a oa aet	hi a voe aet
ni a zo aet	ni a vo aet	ni a oa aet	ni a voe aet
c'hwi a zo aet	c'hwi a vo aet	c'hwi a oa aet	c'hwi a voe aet
int a zo aet	int a vo aet	int a oa aet	int a voe aet

Poelladennou

1. Lavarit penaos e rit da besketañ.
2. Skrivit anioù pemp pesk dour dous, pemp pesk dour mor, an tri fesk a blij deoc'h muiañ.
3. Displegit ar verb : *mont da besketañ*, en amzerioù dieeun.
4. Ober pemp frazenn gant ar ger : ouz.

AR GEVNIDENN



« Paol » eme ar mestr « kit du-hont e korn ar c'hlas, peogwir ne rit netra nemet kaozeal ! »

Ha setu Paolig en e sav e gein troet d'e gamaladed hag e fri ouz ar voger. N'eo ket faro.

Enoeus eo chom e giz-se, hep fiñval na gwelout seurt ebet. Trumm e tremen eur gelienenn e-biou dezañ : kouezañ a ra en eur gwiad-kevnid. Kaer he deus en em zifretañ, n'hell ket mont kuit.

Neuze e wel Paolig paouiou hir ha du o tont er-maez eus eun trepasig, e strad ar gwiad. Ar c'horf a heuilh kerkent.

Euzus eo al loen. En eun taol emañ war ar gelienenn a vroud gant he c'harvanou. Ar gelienenn ne ra finv ebet ken. Sachet eo neuze en toull hir ha du.

Paolig a gemer plijadur o pakañ ar c'helien a blav war ar voger en e gichen hag o skeiñ ar re-mañ d'al loen marlonk. Tremen a ra buan an amzer, ar skol hag ar skolaer a zo pell diouz spered ar paotrig.

Met direnket eo gant ar mestr a lavar dezañ « Deuit d'ho plas, bremañ ! » Gant keuz e kuita Paolig ar gwiad-kevnid.

Ar menozioù

Pelec'h eo bet kaset Paol ? perak ?
 Petra a ra eur gelienenn ?
 Petra a c'hoarvez neuze ?
 Peseurt plijadur a gemer Paol ?
 Perak ez a d'e blas ? ha laouen eo ?

Geriadur

Kaozeal : komz, kuzulikat; huchal; c'hoarzin; mouse'hoarzin, besteodiñ, kaketal.

Gwiad-kevnid : *gwiad*; *gwiadenn*.

Marlonk : lonkañ, lonkad, lonker, lonkek, dislonkañ, dislonkadur, islonk.

Kemmadurioù

Kevnid (eur gevnienn); ar voger (moger); ar c'helien (kelien); eur gelienenn; a vroud (broudañ); e garvanou (karvan); e blas (plas); e teu (dont).

Yezadur

Ar raganô niveriñ : *Diskouez a ra plas an den, al loen pe an dra.*

Ar c'hentañ; an eil; an trede; ar pevare; ar pempvet; an trizekvet; ar milvet.

Displegadur : Gouzout

Tremenet-amstriz

me am eus gouezet
 te ac'h eus gouezet
 eñ en deus gouezet
 hi he deus gouezet
 ni hon eus gouezet
 c'hwi hoc'h eus gouezet
 int o deus gouezet

Peurdremenet

me am boa gouezet
 te az poa gouezet
 eñ en doa gouezet
 hi he doa gouezet
 ni hor boa gouezet
 c'hwi ho poa gouezet
 int o doa gouezet

Da-zont-kent

me am bo gouezet
 te az po gouezet
 eñ en devo gouezet
 hi he devo gouezet
 ni hor bo gouezet
 c'hwi ho po gouezet
 int o devo gouezet

Tremenet-kent

me am boe gouezet
 te az poe gouezet
 eñ en doe gouezet
 hi he doe gouezet
 ni hor boe gouezet
 c'hwi ho poe gouezet
 int o doe gouezet

Poelladennou

1. Skrivit anoiou dek amprevan.
2. Skrivit gerioù eus rummad ar ger : *dant*.
3. Displegit ar verb : *Gouzout ar c'helien*, en amzerioù dieenn.
4. Skrivit unanderenn ar gerioù-mañ; kevnid, kelien, bili, ed, bleuñv.

AN AERLESTR



Fri Paolig a zo peg ouz gwerenn eur stal c'hoariellou. Ouzpenn dek gwech bemdez e teu eno da sellout ouz eur voest vuzudus. Enni ez eus traou brao-kenañ : eur c'harr bihan, loened iskis ha, dreist-holl, eun aerlestr bràs gant tud en e gambrig.

Ya ! met evit kaout eur c'hoariell ez eo ret reiñ daou wenneg ha tennañ eur bilhed. Meur a bez daou wenneg en deus kollet Paolig dija. Koulskoude e fell dezañ bezañ perc'henn war an aerlestr.

Mont a ra d'ar gêr; war eun tamm paper troc'het braoik, e stumm an niver 1 gant liw du. Neuze e tistro d'ar stal, ar baperennig pleget etre e vizied. Lakaat a ra e zorn er voest ha kemmeskañ ar bilhedou. O krenañ eun tammig, ez astenn Paolig e vilhed d'an itron.

Houmañ a zispleg an tamm paper hag a choum saouzanet.

Biskoaz n'eo bet lakaet an niver 1 er voest ganti.

Divinout a ra tro-gamm ar paotrig; neuze e krog en e skouarn hag e gas d'ar gêr.

Peseurt degemer, va zud kaez, a voe graet da Baolig !

Ar menozioù

Pelec'h emañ Paolig ?
 Petra a zo er voest ?
 Penaos e c'heller kaout eur c'hoariell ?
 Petra a fell da Baolig kaout ?
 Penaos en em gemer ar paotrig ?
 Petra a c'hoarvez ?

Geriadur

Eun aerlestr : (aerlistri); eun aervag (aervigi); eun dournijerez; eur c'harr-nij (kirri-nij); eun nijer.

Saouzanet : souezet, sabatuet, estonet.

Meur a bez : meur a zen; meur a wenneg.

Kemmadurioù

Eur voest vuzudus : eun dra vat; eur voest kaer; eun dra gaer.

Daou wenneg : daou gi; diw blac'h; diw wech.

E tistro : e tiskenn; e teu; e tibab.

Yezadur

Ar ragano damziskouezañ : Ne ziskouez ket resis-mat eus pliw e vezer o komz.

An neb a fell dezañ; darn a gred; an holl a lavar; den ne ra van; ne ra netra; ar re all a c'hoarz.

Displegadur

Amzerioù dieeun — Furm bersonel

Bet on	bet em ho	hadet em boa	graet em boe
Bet out	bet ez po	hadet ez poa	graet ez poe
Bet eo	bet en (he) devo	hadet en (he) doa	graet en (he) doe
Bet omp	bet hor bo	hadet hor boa	graet hor boe
Bet oc'h	bet ho po	hadet ho poa	graet ho poe
Bet int	bet o devo	hadet o doa	graet o doe

Poelladennou

1. Penaos e plij deoc'h beajiñ ? Perak ?
2. Displegit pep verb eus al lennadenn en eun amzer dieeun (furm bersonel).
3. Lakait ar ger : o dirak ar verbou da heul : prenañ, tennañ, gouelañ, gwerzañ, bale, mirout, krenañ.
4. Lakait al lennadenn en amzer amdremenet.

AR PEROKED



Brao ha mistr e oa al labous gant e chupenn gwer ha melen. Gwech e veze staget ouz eur skeulig diwar-bouez eur chadenn voan; a-wechou, ivez, e valse en ti pe el liorz, dieub evel eur c'haz.

Distagañ a rae bommou iskis a lakae an holl da c'hoarzin.

Yannig a gare kalz e labous hag hemañ a blije dezañ ober arvestou fentus dirak ar paotr bihan. E c'hervel a rae dre e ano, zoken : « Demat, Yann ! » a grie pep beure pa save ar bugel.

War-dro peder eur pa veze echu ar skol e nije ar peroked davet e vestr bihan. A-bell e anaveze e-touez ar skolidi all hag e plave war e skoaz. Neuze e teuent o daou d'ar gêr o kontañ atao an hevelep istoriou berr.

Eun devez ne welas ket ar paotrig e labous o tont davetañ. « Petra a zo c'hoarvezet ? » a soñjas.

Klasket e voe dre-holl; labous ebet. Glac'haret e voe Yannig. Pell goude-se, e kavas korf an evn en eun doufflez, eun tenn en e benn. Lazet e oa bet gant eun den fallakr bennak.

Ar menozioù

Grit poltred ar peroked
Diskouezit pegement e plije Yannig dezañ
Petra a c'hoarvezas eun devez ?
Piw en doa lazet an evn, war ho meno ?

Geriadur

Gervel : (galvet); mervel (marvet); dere'hel (dalc'het); menel (manet); genel (ganet); sevel (savet).

Pep beure : bep gwech; bemdez; bemnoz; e pep ti.

Davetañ : nemetañ, diwarnañ, dirazañ, digantañ, dindañ, eveltañ, hervezañ.

Kemmadurioù

Diwar-bouez : diwar varc'h; diwar-benn.

War-dro : war varc'h; war c'horre; war-du.

A-bell : a-wechou; a-boan; a-vec'h.

Yezadur

An araogenn : Ar ger-mañ a vez implijet da unaniñ daou, c'her all :

Da skouer : eur c'harr-dre-dan; bale war varc'h.

Roll : ouz, diwar, da, dre, e-touez, gant, war, hep, a, evit, davet, betek, dindan, goude ...h, a.

Displegadur


Gant skoazell ar verb : Ober

hadañ a ran	mont a rin	gouzout a raen	ober a ris
— a rez	mont a ri	— a raes	— a rejout
— a ra	— a ray	— a rae	— a reas
— a reomp	— a raimp	— a raemp	— a rejomp
— a rit	— a reot	— a raec'h	— a rejoc'h
— a reont	— a raint	— a raent	— a rejont

Poelladennou

1. Peseurt evn a blij deoc'h muiañ ? Perak ?
2. Savit frazennoù gant an araogennou-mañ : ouz, da, a, evit, betek, dindan, goude, hep, gant, war.
3. Displegit ar verb : *karout e vamm*, gant skoazell ar verb ober.
4. Lakait verbou al lennaden er furm nac'hañ.

BEZOMP NAET !



Pa erruas Paolig er gêr, eun devez, e lavaras d'e vamm : « Mamm, ret e vo dit prenañ, evidon, eur broust-dent ha soavon ! — Piw en deus lakaet ar menoz-se ez penn, va bugel kaez ? — Feiz ! ar mestr; sellet piz en deus hizio ouz hon daouarn, hor gouzoug, hon diskouarn, hor penn, hon ivinou ha distaget dirazomp eur brezegenn eus ar re gaerañ : « Eur bugel kempenn » emezañ « a zle, pep beure, gwalc'hiñ e zremm hag e zaouarn gant soavon ha dour, forz pegement. Dleout a ra ivez broustañ e zent, kribañ e vleo, skarzañ e ivinou hag e ziskouarn. An aliesañ ar gwellañ, e tle naetaat e gorf a-bez ha, dreist-holl, e dreid. Neuze e seblant dezañ bezañ disheñvel mik diouz ar baotred digempenn. Faro eo hag, ouzpenn-se, n'o deus ket ar c'hleñvedou kement a grog warnañ ! »

Prenañ a reas ar vamm ar pez a c'houlenne ar paotrig; hag, adalek neuze e teuas Paolig da vezañ eur bugel a-zoare. E vamm a voe stad enni.

Ar menozioù

Petra a lavaras Paolig d'e vamm ?
 Petra en doa graet ar mestr ?
 Peseurt aliou a roas ar mestr ?
 Petra a reas mamm Baolig ?
 Perak ez eo ret bezañ naet ?

Geriadur

Daouarn : daoulin; daouilin; daouividig; divrec'h; diwlez; diskouarn; daoulagad; diwhar.
Disheñvel : diskoulm; diskred; disfiizout; disheol; dishuai; dislavarout; disliw; dislonkañ.

Kemmadurioù

E vamm : e vleo...h a...; eus ar re gaerañ (kaer); ar re vrasañ (bras); ar re voanañ (moan); ar baotred (paotr); kement a grog (krog); kement a dud (tud); a c'houlennas (goulenn); a zoare (doare); da vezañ (bezañ).

Yezadur

Ar stagell : Ar ger-mañ a servij da unaniñ diw lavarenn pe daou c'her eus an hevelep doare.
Da skouer : Bale a ran *pa* vez brao an amzer.
 An amzer a zo brao *ha* c'hwek. N'eo *na* brao *na* c'hwek.
 Mont a rin *ma* vez tomm an heol.
 ROLL : Pa, ma, mar, peogwir, ha, hag, na, hogen, met, goude ma... h, a.

Displegadur : Bezañ

Doare-divizout : (bremañ-tremenet)

<i>Furm diberson</i>		<i>Furm bersonel</i>	
me a vefe	me a vije	neuze e vefen	neuze e vijen
te a vefe	te a vije	— e vefes	— e vijes
eñ (hi) a vefe	eñ (hi) a vije	— e vefe	— e vije
ni a vefe	ni a vije	— e vefemp	— e vijemp
c'hwi a vefe	c'hwi a vije	— e vefec'h	— e vijec'h
int a vefe	int a vije	— e vefent	— e vijent

Poelladennou

1. Lavarit petra a rit pep beure pa savit.
2. Grit frazennoù gant ar stagelloù da heul : ma, ha, hogen, pa, na.
3. Displegit ar verb : *Bezañ laouen ma vefe brao an amzer*, en doare divizout (diw furm).
4. Skriviñ anioù savet evel : daouarn, divrec'h.

AR FOENN



Erru eo miz mezeven. An heol, tommoc'h-tommañ a ro d'ar pradeier eul liw melen; eur frond plijus a sav eus ar foenn.

Beure mat e nij eur vrumenn skañv a-us d'an douar, o kuzat ar gwez hag an oabl. Kerkent hag an deiz, en em rog al latar. Kaerder ar pradou a lugern neuze.

Bremaik e stago ar foennerien gant al labour... Deut int war an dachenn. Mont a ra ar filc'hier war raok. Kement taol a ro pep hini a led war an douar eur mañan pouezus. Ar fronellou a zo hilliget gant c'hwez mat ar foenn. Ar bleunioù liesliw a stou o fenn a-gevret gant ar c'horzennou hag o maro a hañval bezañ maro an nevez-amzer.

Pa vo kraz a-walc'h ar foenn dindan bannou grizias an heol, e vo distroet gant ferc'hier koad. Neuze e vo kaset d'ar vereuri ma vo berniet kempenn war al leur.

Boued a vo, eta, evit al loened e pad ar goañv kriz.

Ar menozioù

Penaos e vez an amzer e miz mezeven ?
 Penaos e vez troc'het ar foenn ?
 Petra a vez graet evit sec'hañ ar foenn ?
 Da betra e servij ar foenn ?

Geriadur

Genver, c'hwevrer, meurz, ebrer, mae, mezeven, gouere, eost, gwengolo, here, du, kerzu.

Pradeier : parkeier; doureier; botelier; koadier.

Al latar : kounoul (eur goumoulenn); morenn; brumenn; morc'hlaou, aezenn.

Kaerder : braster; tommder; skañvder.

Falz : (filziar); fale'h (filc'hier); forc'h (ferc'hier).

Kemmadurioù

O kuzat : o prenañ; o tennañ; o welout; o vont; o tont; o tastum.

Korzenn : eur gorzenn; ar c'horzennou.

C'hwez mat : c'hwez kreñv; c'hwez pounner.

Yezadur

Ar rakverb : Implijet e vez da glokaat ster eur verb pe eun ano gwan.

Da skouer : Debriñ kalz; mont buan; mat-tre; kaer-dreist.

Roll : meurbet, dreist, kenañ, bremaik, eno, a-walc'h, neuze, goude, amañ, aze, kenañ, prestik, dec'h, antronoz, nann, ya ...h. a.

Displegadur : Kaout

Doare-divizout : (bremañ-tremenet)

Furm diberson		Furm bersonel	
me am befe	me am bije	gwin am befe	gwin am bije
te az pefe	te az pije	— az pefe	— az pije
eñ en defe	eñ en dije	— en defe	— en dije
hi he defe	hi he dije	— he defe	— he dije
ni hor befe	ni hor bije	— hor befe	— hor bije
c'hwi ho pefe	c'hwi ho pije	— ho pefe	— ho pije
int o defe	int o dije	— o defe	— o dije

Poelladennou

1. Petra a blij deoc'h muiañ : ar foennadeg pe ar mederez.
2. Lakait rakverbou war-lerc'h ar gerioù-mañ : labourat, klañv, kerzout, brao, emañ.
3. Displegit ar verb : kaout anoued ma vefe erc'h, en doare-divizout (diw furm).
4. Lakait An avalou e-lerc'h Ar foenn ha savit eul lennadenn all.

WAR RIBL AR STËR



Ar glesker, azezet war eun delienn loa-zour, a sell gant daoulagad bras ouz an dour boull ha sioul.

An dluzenn, prim hag aonik, a lamm gant an amprevaned a vez lonket kerkent ha kouezet er stêr.

An nadoz-aer, hir ha moan evel eun dimezell vistr, a fraoñv goustadik a-us d'ar red gorrek, o soubañ, he lost liesliw ennañ, bep an amzer. Eun tammig plouzenn, lestrig skañv ha fiñvus, a riskl, pennfollet gant an avei, e-touez an deliou douget gant ar waz.

Gwennilied o chupennig du ha gwenn, a spluj diouz an oabl uhelañ hag, o tremen a-rez an dour, a lonk c'hwiñv a-leiz genou.

Du-hont e sell piz ar miliner ouz e rod harzet gant baster ar c'houer.

Eur pesketaer, kluchet war ar geot, a hañval gervel ar pesked evit o lakaat en e baner.

Pebez sioulder a-hed ar stêr ! Pebez c'hwekter hag ivez nag a vuhez kuz e-touez al louzou druz !

Ar menozioù

Pelec'h emañ ar glesker ? Petra a ra ?
 Penaos eo an dluzenn ? Petra a ra ?
 Penaos eo an nadoz-aer ? Petra a ra ?
 Petra a weler war an dour ?
 Petra a ra ar gwennilied ? ar miliner ? ar pesketaer ?
 Perak eo sioul an traou ?

Geriadur

Eur ster : eur waz-dour (gwaz); eur c'houer (gouer); eun adster; eun aber.

Ar gwennilied o chupennig gwenn : Paol e vragou bras; Yann e votou koad; Loeiz e lanchenn hir.

Pennfollet : pennbaz; penndolog; pennhêr; pennlec'h; penntieg; pennwele.

Kemmadurioù

Ar plouz (eur blouzenn); ar gwennilied (ar wennili).

Ar c'houer (gouer); ar pesketaer; ar besketaerez; ar pesketaerez.

Yezadur

Al lavarenn : Ar miliner a sell ouz e rod.

Eur pesketaer a hañval gervel ar pesked. An nadoz-aer a fraoñv goustadik.

Al lavarenn a servij da ziskleriañ eur menoz.

Displegadur : Hadañ

Doare-divizout : (bremañ-tremenet)

<i>Furm diberson</i>		<i>Furm bersonel</i>	
me a hadfe	me a hadje	heiz a hadfen	heiz a hadjen
te a hadfe	te a hadje	— a hadfes	— a hadjes
eñ (hi) a hadfe	eñ (hi) a hadje	— a hadfe	— a hadje
ni a hadfe	ni a hadje	— a hadfemp	— a hadjemp
c'hwi a hadfe	c'hwi a hadje	— a hadfec'h	— a hadjec'h
int a hadfe	int a hadje	— a hadfent	— a hadjent

Poelladennoù

1. Petra hoc'h eus-hu gwelet en eur vale a-hed eur waz-dour ?
2. Savit gerioù all diwar ar ger : *liw*.
3. Displegit ar verb : *labourat start*, en doare-divizout (diw furm).
4. Lavarit ar pez a c'hellfec'h gwelout diwar ribl eun heut.

AR C'HOAD SIOUL



Peger plijus eo mont d'ober eun tammig tro er c'hoad-se, dreist-holl diouz ar beure !

Stank eo ar gwez ha dibaot an aleziou koulz hag ar gwenodennou. Kinvi gwer ha rous en em led eno evel eur pallenn teo ha gwak.

Sioulder an natur a zo a-unan gant hini al loened.

An evned a nij didrouz, a vranc da vranc, e-touez an deliou. Eur gwiñver, beo-buhezek, a lamm eus an eil skourr d'egile hep ma vefe klevet hag evel p'en defe eskell.

Gwech, eun hoc'h-gouez a red, prim-ha-prim ha rag-eeun, etrezek ar brouskoadou. Konikled dispont a lamm a-gevret war ar c'hlasvez. Mont a reont da guz d'an disterañ trouz.

An avel a stou nebeudik penn ar gwez. Eun delienn, distaget diouz he brank, a nij eur pennadig en aer a-raok kouezañ war al leton.

Spered ar baleer en em sant ker sioul hag an traou.

Ar menozioù

Penaos eo ar c'hoad ?
 Petra a ra an evned ? ar gwiñver ?
 Komzit diwar-benn an hoc'h-gouez, ar c'honikled.
 Petra a ra an avel ? eun delienn ?
 Perak eo sioul spered ar baleer ?

Geriadur

Kontrol : sioul (trouzus); plijus (displijus); stank (boull); dibaot (paot); teo (moan); dispont (spontik).

Heñvelster : sioul (didrouz, peoc'hus); dibaot (rouez); prim (buan-dillo); dispont (hardis).

Kemmadurioù

Ar gwenodennou (eur wenodenn); didrouz; dibaot; a vranc da vranc; a varr da varr; a zeiz da zeiz. Ar c'hlasvez (glasvez); eur baleer (eur valeadenn).

Yezadur

Ar frazenn : En eur frazenn ez eus meur a lavarenn ha, rak-se, meur a venoz.

Skouerioù : An evned a nij didrouz hag ar gwiñver a lamm a vranc da vranc.

Pa c'hwez an avel e kouez an deliou war al leton.

Displegadur : Mont

Doare-divizout : (bremañ-tremenet)

<i>Furm diberson</i>		<i>Furm bersonel</i>	
me a yafe	me a yaje	neuze ez afen	neuze ez ajen
te a yafe	te a yaje	— ez afes	— ez ajes
eñ (hi) a yafe	eñ (hi) a yaje	— ez afe	— ez aje
ni a yafe	ni a yaje	— ez afemp	— ez ajemp
c'hwi a yafe	c'hwi a yaje	— ez afec'h	— ez ajec'h
int a yafe	int a yaje	— ez afent	— ez ajent

Poelladennou

1. Ha plijout a ra deoc'h ar c'hoadou ? Perak ?
2. Skrivit kontrol hag heñvelster ar gerioù-mañ : treut, paouez, huchal, koant, sklaer.
3. Displegit ar verb : *mont da vale*, en doare-divizout (diw furm).
4. Diwar anoiou-gwan al lennadenn, savit gerioù evel : moanoc'h, bravoc'h, disterañ.

AR MOR



Setu amañ an tevenn uhel ha sonn. Du-hont, pell-pell e weler an dremmwel ha gouelioù bihanik ha difiñv ar bigi.

E-traoù, war an traez, e vesk eun engroez liesliw. E-touez ar vein noaz hag er poullou dour, e stou ar gran-kerien war o labour.

Safar ar mor bras a sav dre-holl. Eun eonenn gwenn-kann ha bouillhus a laka dantelez en-dro d'ar rec'hell. An houlennoù tennañ hec'h alan a laka ar bigi da vranskellat evel eur bugel barlennet gant e vamm. Peger gwan ha dic'halloud eo, eta, an den e-skoaz ar mor don hag ec'hon !

An aye! a sav bremañ kreñvoc'h-kreñvañ; an tonnou a ya war rustaat. Stouiñ a ra gwern ar bigi. An evned mor a yud a unvouez gant ar arneo. Koumoul du a red en oabl.

Poent eo d'ar besketaerien ha d'ar valeerien mont er gwasked. Broc'het eo ar mor.

Ar menozioù

Penaos eo an tevenn ?
 Petra a zo war linenn an dremmwel ?
 Petra a weler e traoñ an tevenn ?
 Komzit diwar-benn ar mor.
 Ha kreñv ea ar mor ?
 Petra a ra an holl pa sav an arneo ?

Geriadur

Ar mor : an houlennoù, an houlennoù; an tonnou, ar gwagennoù (ar wagenn); ar reier (eur roc'h); ar rec'hell (eur roc'hell); eur garreg (karreg, ar c'herreg).

Brañskellat : brañsellat; brañsigell (eur vranñsigell); luskellañ; luskellerez; luskellus.

Kemmadurioù

Eun eonenn wenn; eun eonenn gwenn-kann; dic'halloud (galloud); ar besketaerien (eur pesketaer); ar valeerien (eur baleer).

Yezadur

Doare ar gerioù : Safar ar mor bras a sav dre-holl.

Safar : ano gourel, unander.

ar : ger-mell resis.

mor : ano gourel, unander.

bras : ano-gwan doareañ.

sav : verb sevel, doare diskleriañ, amzer-vremañ.

dre-holl : rakverb.

Displegadur : Ober

Doare-divizout : (bremañ-tremenet)

<i>Furm diberson</i>		<i>Furm bersonel</i>	
me a rafe	me a raje	hadañ a rafen	hadañ a rajen
te a rafe	te a raje	— a rafes	— a rajes
eñ (hi) a rafe	eñ (hi) a raje	— a rafe	— a raje
ni a rafe	ni a raje	— a rafemp	— a rajemp
c'hwi a rafe	c'hwi a raje	— a rafec'h	— a rajec'h
int a rafe	int a raje	— a rafent	— a rajent

Poelladennoù

- Petra a welit war ribl ar mor ?
- Dielfennit ar gerioù-mañ : koumoul du a red en oabl.
- Displegit ar verb : *ober e zevel*, en doare-divizout (diw furm).
- Skrivit liester an anoù-mañ : bag, maen, krank, den, bugel.

AR FOAR



Aet eo loened ar vereuri d'ar foar abaoe c'hwee'h eur diouz ar beure. Ar moc'h bihan a lamm an eil war egile en o c'hasedou klouedek. En o c'hichen, setu daou leue rous ha gwenn, sioul evel deñved.

Penngwenn ha Bihanig, ar saout, a ya goustadik war ribl an hent. An ebeul, Kaezig, spontet gant ar c'hirri-tan, a ra gwinkadennou ha c'hwirnadennou fentus.

Erru e kêr ez eo renket al loened pep hini eus e du : ar saout a-hed moger an ti-kêr; ar moc'h war ar blasenn ha Kaezig stok ouz ar vered koz.

Ar varc'hadourien, o skourjez war o skoaz, a sell piz ouz ar chatal.

Ar moc'h bihan nemet daou, a zo gwerzet raktal.

Eul leue, ivez, a gav eur prener hepdale. Penngwenn a ya gant eur marc'hadour pinvidik. Kaezig, eñ, n'eo prenet nemet da beder eur, eun tamm war-lerc'h al leue all.

Ar foar a zo bet mat a-walc'h. Bihanig, war-droad, hag an daou bemoc'h en o c'hased a gemer penn o hent etrezek ar vereuri. Job ha Jul ar vevlien ne lavaront ger. Kollet o deus loened karet ha skuiz int eun tammig.

Ar menozioù

Pelec'h emañ ar moc'h hag al leueou ?
 Pelec'h emañ ar saout hag an ebeul ?
 Pelec'h e vez kaset pep loen ?
 Petra a ra ar varc'hadourien ?
 Pe loened a zo bet gwerzet ?
 Ha laouen eo ar baotred ? perak ?

Geriadur

Ar moc'h; eur pemoc'h, eul leue; leueou; eur vuoc'h (buoc'h; bpoc'hed); saout; eun ebeul; ebeulien; eun dañvad, deñved, eur c'havr (givri); eur c'hilhog (kilheien); eun bouad (houidi); eun ejen (oc'hen).

Verbou : soroc'hal, blejal, begeliat, c'hwirinat, grakal.

Kemmadurioù

O c'hasedou (kased); o c'halon (kalon); o fenn (penn); o zad (tad); o c'hichen (kichen).

Ar vereuri (mereuri); ar marc'hadour pinvidik; ar varc'hadourien binvidik.

Yezadur

Dielfennadur ar frazenn :

Job ha Jul ne lavaront ger rak kollet o deus loened karet.

Er frazenn-se ez eus diw lavarenn.

1° Job ha Jul ne lavaront ger.

2° Rak kollet o deus loened karet.

Displegadur : Gouzout

Doare-divizout : (bremañ-tremenet)

<i>Furm diberson</i>		<i>Furm bersonel</i>	
me a oufe	me a ouije	neuze e oufen	neuze e ouijen
te a oufe	te a ouije	— e oufes	— e ouijes
eñ (hi) a oufe	eñ (hi) a ouije	— e oufe	— e ouije
ni a oufe	ni a ouije	— e oufemp	— e ouijemp
c'hwi a oufe	c'hwi a ouije	— e oufec'h	— e ouijec'h
int a oufe	int a ouije	— e oufent	— e ouijent

Poelladennou

1. Ha bet oc'h en eur foar ? Petra hoc'h eus gwelet ha klevet ?


2. Dielfennit ar frazenn-mañ :

Pa vo echu ar foar e tistroy an dud d'ar gêr.

3. Displegit ar verb : *gouzout ar gentel en doare-divizout* (diw furm).

4. Lakait al lennadenn en amzer-da-zont.

AL LABOURADEG



Jobig a zo war e bemzek vloaz. C'hoant en deus da labourat e kêr. Bet eo, en deiz all, en eul labouradeg kirri-tan.

Degemeret mat eo bet gant ar rener. E-pad div eur bennak, en deus diskouezet hemañ da Job an holl ardivinkou.

Unan bras a laka ar poleou da vont en-dro. Niverusmeurbet eo ar rodou.

Eun doare chadenn he deus dedennet Jobig ivez. Tro-dro dezi ez eus micherourien; pep hini a ra atao an hevelep labour; hemañ a stard togou-biñs; hennez a laka ibiliou-houarn, ar re all a beurechu al labour; evel-se e poaniont e-pad an deiz hag e-doug ar bloaz.

Pa wel kement-se, e lavar Jobig kenavo d'ar rener. Soñjal a ra : « Biken mui ne lakain va zreid en eur seurt ifern. Gwelloc'h eo ganin chom war ar maez. Moanoc'h, a-dra-sur, e vo va gounid; met yac'hus e vo va buhez ha dinec'h va spered ! »

Mont a ra neuze Jobig evel deskard e ti eur c'halvez eus e vro.

Ar menozioù

Petra en deus c'hoant Jobig d'ober ?
 Pelec'h ez a ? Petra a wel ?
 Ha derc'hel a ra d'e venoz ? perak ?
 Peseurt micher a gemer Jobig ?

Geriadur

Eul labouradeg : eur goadeg (koad); eun deryenneg; eur segaleg; eur winieg; eun dennadeg.

Eur c'halvez : eur munuzer; eur gov; eur mekaniker; eur gwiader; eur barazer; eur c'hemenner; eur mañsoner; eun toer; eul liver; eur gweraer; eul liorzer; eur gounideg.

Kemmadurioù

A zedennas (dedennañ); va zreid (treid); va buhez; va fenn (penn); va c'halon (kalon).

pemzek vloaz; *eur bloaz*; *tri bloaz*; *pevar bloaz*; *pemp bloaz*; *nao bloaz*; c'hwec'h vloaz; kant vloaz.

Yezadur

Roll ar gerioù : Jobig en deus pemzek gwenneg.

Jobig : rener ar verb (Piw en deus pemzek gwenneg ? Jobig).
gwenneg : renadenn ar verb. (Petra en deus ? pemzek gwenneg).

Displegadur

Doare-gourc'hemenn

<u>Bezañ</u>	<u>Kaout</u>	<u>Hadan</u>	<u>Kemer</u>
Bez	Az pez	Had	Kemer
bezet	en (he) defet	hadet	kemeret
bezomp	hor bezet	hadomp	kemeromp
beziñ	ho pet	hadit	kemerit
bezent	o defent	hadent	kemerent

Poelladennou

1. Anavezout mat a rit eur micherour bennak; petra hoc'h eus gwelet en e stal-labour ?
2. Lavarit roll ar gerioù-mañ :
Jobig en deus kemeret *tog Yannig*.
3. Displegit verbou al lennadenn en doare-gourc'hemenn.
4. Lakait al lennadenn er c'hentañ gour, unander.

GOUEL AR BARREZ



Disul diwezañ edo gouel ar barrez. En-dro d'an tiker e oa staliou e-leiz, karouseliou, tennadegou ha c'hoariou a bep seurt.

Mont a rae ar plac'hed yaouank, kazel-ha-kazel gant o mignoned eus an eil stal d'eben o c'hoarzin a-greiz kalon.

Ar mammou, gant krennarded en-dro dezo, a oa heñvel ouz houidi oc'h evesaat o laboused bihan. Gwestell a ranke d'ar re-mañ kaout bep an amzer. Hag e veze cholori. Ar sonerez a oa plijus-kenañ.

En tavarniou ez ae ar gorollerien yaouank war-raok gant an dansou nevez; eur blijadur vras a gemerent. Ar baotred a c'hoarie kilhou pe voullou e porz an ostaleriou ma oa bet aozet eno aleziou flour.

Betek peuznoz e chomas ar yaouankizou war al leur-gêr.

Ar vugale, avat, a oa bet kaset d'o gwele, skuiz-divi, evel ma c'heller krediñ.

Ar menozioù

Pelec'h edo ar gouel ?
 Petra a rae ar plac'hed yaouank ?
 Ouz petra e oa heñvel ar mammou ?
 Petra a felle d'ar vugale kaout ?
 Petra a oa en tavarniou ?
 Petra a rae ar baotred ?
 Pelec'h e vœe kaset ar vugale ? perak ?

Geriadur

Kazel-ha-hazel : lerc'h-ou-z-lerc'h; stok-ou-z-stok; holl a-gevret; a-unan.

Sonerez : sonadeg; sonenn; soner; sonskriverez; sonaozour; heson; dasson (hekleo).

Dansou : koroll; korolladeg; koroller; korolliñ.

Kemmadurioù

Ar voure'h (bourc'h); en-dro (tro); ar mammou (ar vamm); an tavarniou (an davarn); ar gorollerien (koroll); pe voullou (boullou); evel ma c'heller (gallout).

Yezadur

Doare al lavarennou :

Ar baotred a c'hoarie e porz an ostaleriou ma oa bep aozet eno aleziou flour.

Er frazenn-se ez eus diw lavarenn :

- 1° Ar baotred a c'hoarie e porz an ostaleriou (pennlavarenn).
- 2° Ma oa bet aozet eno aleziou flour (lavarenn suj).

Displegadur

Mont	Doare-gourc'hemenn		Brasaat
	Gouzout	Ober	
kae (a)	gouez	gra	brasa
aet	gouezet	graet	brasaet
eomp	gouezomp	greomp	brasaomp
kit (it)	gouezit	grit	brasaït
aent	gouezent	graent	brasaent

Poelladennou

1. Komzit diwar-benn gouel ho parrez.
2. *Dielfennit ar frazenn-mañ* :
 Ar vugale, avat, a oa bet kaset d'o gwele, skuiz-divi evel ma c'heller krediñ.
3. Displegit verbou al lennadenn en doare gourc'hemenn.
4. Skrivit liester pemp ano war-lerc'h eur ger-mell.

AN EHAN-SKOL



Emañ ar vugale o tont eus ar skol, o levriou dindan o c'hazel. Komz a reont diwar-benn ar pez a raint e-pad ar vakañsou.

« Me » eme Jul « a yelo e ti va eontir a zo o terc'hel eur vereuri pell a-walc'h ac'han. Maesa a rin ar chatal ha sikour ar vicherourien e-kerz ar mederez hag an dornadeg! »

Job a lavar : « Me a chomo er gêr da zeskiñ labourat gant va zad a zo munuzer; plijout a ra din kalfichat koad! »

« Me » eme Erwan « a fell din deskiñ neuial er bloaz-mañ; mont a rin gant va c'henderv Loeiz war ribl ar mor en eur c'henkiz d'am moereb! »

« Ha te, Yannig, petra a ri? » a c'houlenñ ar vugale digant eur paotrig m'emañ neuz ar baourentez war e zilhad. « Feiz » eme ar bugel « ret e vo din labourat en ti da sikour va mamm a zo intañvez. Mont a rin ivez da geuneuta, da dañvouesa, da gutuilh had-lann ha, pa vo deut an diskar-amzer, da gistina! » Eun tammig truez a sav e kalon e geneiled.

Ar skolidi en em guita an eil egile neuze evit daou viz a seblant dezo bezañ hir-kenañ.

— 55 —

Ar menozioù

Petra a ra ar vugale ?
 Petra a ray Jul ?
 Petra a blij da Job ?
 Petra a fell da Erwan ?
 Petra a ray Yannig ?
 Pegeit e pado an ehan-skol ?

Geriadur

E-kerz : e-pad; e-doug; e-korf.
Deskiñ : deskamant; deskadurez; deskard; deskidik; desket; dizesk.
Baourentez : karantez; fallentez; braventez.
Neuz : aer; stumm; feson.

Kemmadurioù

O tont (dont); o c'hazel (kazel); o terc'hel (derc'hel); ar mederez; eur vederez; va c'henderv (kenderv); da geuneuta (keuneut); da dañvouesa (tañvouesa); da gistina (kistin).

Yezadur

Dielfennadur ar frazenn : Ar skolidi... hir-kenañ.

Er frazenn-se ez eus diw lavarenn :

1° Ar skolidi en em guita an eil egile neuze evit daou viz (pennlavarenn).

2° A seblant dezo bezañ hir-kenañ (lavarenn suj, renadenn ar ger miz).

Displegadur : Stumm nac'hañ

<i>Bezañ</i>	<i>Kaout</i>	<i>Gwelout</i>	<i>Kavout</i>
n'on ket	n'em eus ket	ne welan ket	ne gavis ket
n'out ket	n'ec'h eus ket	ne welez ket	ne gavjout ket
n'eo ket	n'en (he) deus ket	ne wel ket	ne gavas ket
n'omp ket	n'hon eus ket	ne welomp ket	ne gavjomp ket
n'oc'h ket	n'hoc'h eus ket	ne welit ket	ne gavjoc'h ket
n'int ket	n'o deus ket	ne welont ket	ne gavjont ket

Poelladennou

- Petra a rit-hu e-pad an ehan-skol ?
- Savit teir frazenn, teir lavarenn e pep hini.
- Lakaït verbou al lennadenn er stumm nac'hañ.
- Skrivit pemp frazenn er stumm nac'hañ.

AN TANVOUESA



Troc'het eo bet ar gwiniz en holl barkou. Mont a ra Janig war ar maez da dañvouesa. C'hwitellat a ra gant al levenez rak ne blij ket dezi labourat en ti.

Setu amañ park bras Job ar Maout. Na kaer eo an tañvouez ennañ !

Ha Janig er park. N'eo ket bet rastellet mat an dachenn. Ar plac'hig a zastum gwiniz e-leiz hag a stroll ar plouz e malanou bihan.

Kaer he deus dastum, menel a ra tañvouez, forz pegement. Eürus eo Janig; n'he devo ket kalz a hent d'ober hizio.

Plegañ a ra he c'hein buanañ ma c'hell. Erfin e teu da vezañ skuiz; neuze e kemer eun ehan war ziribin eur c'hleuz.

Bras ha pouñner eo he sammad bremañ. Mont a ra etrezek ar gêr.

Warc'hoaz e titroy adarre war-du ar parkou. Pa vo echu al labour-se, e stago da skeiñ war ar pennou fonnus ha melen gant eur freilh bihan pe gant eur c'holvaz. An edennou a lammo a bep kostez; neuze e vint lakaet e seier don ha kaset d'ar miliner d'ober bleud.

An tiegez ne vanko ket a vara e-pad ar goañv.

Ar menozioù

Perak eo laouen Janig ?
 Penaos eo park Job ar Maout ?
 Petra a ra Jannig ?
 Perak eo pouñner he sammad ?
 Petra a ray Jannig pa vo echu an tañvouesa ?
 Perak ez a Janig da dañvouesa ?

Geriadur

Tañvouez : eun dañvouezenn; greun (eur c'hreunenn); dornañ; malañ; bleud; brenn; toaz; goell.
Levenez : joa, laouenidigez; *Plouz* : kolo.
Plegañ : Stouñ; soublañ; gweañ.
Ti : ti-annez; ti-kêr; ti-kouez; tieg; tiegez.

Kemmadurioù

En holl barkou (park); an holl dud (tud); ne blij ket (plijout); an dachenn (tachenn); a zastum (dastum); he c'hein (kein); ma c'hell (gallout); e teu (dont); war ziribin (diribin); e tistroy (distrein); eur c'holvaz (golvaz); ne vanko ket (mankout).

Yezadur

Dielfennadur : An tiegez ne vanko ket a vara e-pad ar goañv.
an : ger-mell resis, a spisa ster an ano, *tiegez*.
tiegez : ano boutin, gourel, unander, rener ar verb mankout.
ne...ket : rakverb nac'hañ, stag ouz ar verb mankout.
vanko : verb mankout, doare diskleriañ, amzar-da-zont, trede gour, unander.
a : araogenn, a stag ar verb mankout d'ar ger bara.
bara : ano boutin, gourel, unander, renadenn ar verb mankout.
e-pad : araogenn, a stag ar verb mankout d'ar ger goañv.
goañv : ano boutin, gourel, unander, renadenn ar verb mankout.

Displegadur


Stumm goulennata

Ha kemer a rin ?	Ha kavout a ris ?
Ha kemer a ri ?	Ha kavout a rejout ?
Ha kemer a ray ?	Ha kavout a reas ?
Ha kemer a raïmp ?	Ha kavout a rejomp ?
Ha kemer a reot ?	Ha kavout a rejoc'h ?
Ha kemer a raint ?	Ha kavout a rejont ?

Poelladennou

1. Ha gwelet hoc'h eus dornañ gwiniz ? Penaos e vez graet ?
2. Dielfennit ar gerioù-mañ : Plegañ a ra e gein buanañ ma c'hell.
3. Lakait verbou al lennadenn er stumm goulennata.
4. Skrivit pemp frazenn er stumm goulennata.

KOAD AL LOUARN



Ar c'hoadig koant-mañ en em gav e-kichen eur gêrig vrudet eus Bro-Dreger, war ribl eur stêr, plijus-meurbet pa zeu dour ar mor d'he gwelout.

Gwechall e oa stank-kenañ gwez ar c'hoad ha sonn o fennou. O c'hefiou teo hag uhel a save faro etrezek an oabl hag o deliadur gwer en em zistaole braoik e dour ar gourlen.

E-touez ar gwez e oa gwenodennou bihan e-leiz.

Bez'e vezent eur redva dispar evit ar vugale. Eno e oa ivez eur blasenn vihan, geotek, ma chome an dud warni da eveziañ o ziegez bemdez e-pad an hañv.

Daoust d'an dour bezañ lous a walc'h gant al lec'hid, e wiske an dud yaouank o advragou hag e neuient e-pad an endervez hep kemer eun ehan.

Ar c'hoad a oa, eta, evit kêriz, eur goudor disheoliek fresk ha yac'hus.

Ar menozioù

Pelec'h en em gav ar c'hoad ?
 Petra a oa eno gwechall ?
 Da betra e servije ar gwenodennou ?
 Piw a yae war ar blasenn ?
 Petra a rae an dud yaouank ?
 Ha plijout a rae ar c'hoad da gêriz ? perak ?

Geriadur

Gwechall : bremañ, goude, da-zont, biskoaz, kammed, biken, birviken, hiviziken.
Teurel : (taolet); disteurel (distaolet); resteurel (restaolet).
Redva : c'hoariva; kelc'hva; gweledva.
Endervez : dere'hent, antronoz.

Kemmadurioù

En em gav (kavout); eur *gêrig* (kêr) *vrudet* (brudet); pa zeu (dont); o fennou (penn); o c'hefiou (kef); en em zistaole (disteurel); ar vugale (bugel); eur *blasenn* (plasenn) *vihan* (bihan); o ziegez (tiegez); a gustume (kustum); a wiske (gwiskañ).

Yezadur

Dielfennadur ar frazenn : Eno e oa ivez... e-pad an hañv.
 Er frazenn-se ez eus diw lavarenn :
 1° Eno e oa ivez eur blasenn vihan geotek (pennlavarenn).
 2° Ma chome an dud warni da eveziañ o ziegez, bemdez e-pad an hañv (lavarenn suj, renadenn ar ger *blasenn*).

Displegadur

Stumm emober : kavout

Me en em gav	neuze en em gavan	goude en em gavis
te en em gav	— en em gavez	— en em gavjout
eñ (hi) en em gav	— en em gav	— en em gavas
ni en em gav	— en em gavomp	— en em gavjomp
c'hwi en em gav	— en em gavit	— en em gavjoc'h
int en em gav	— en em gavont	— en em gavjont

Poelladennou

1. Ha plijout a ra deoc'h ar c'hoadeier ? perak ?
2. Dielfennit ar frazenn-mañ. O c'hefiou teo... e dour ar gourlen.
3. Displegit ar verbou-mañ er stumm emober : gleazañ, gwiskañ (holl amzeriou ha furmioù).
4. Skrivit pemp frazenn diwar-benn koad al louarn.

KOAD AL LOUARN (*kendalc'h*)



Eun devez e teuas koadourien hag a droc'has an holl vez kaer betek an hini diwezañ. Adalek neuze ne voe mui darempredet al lec'h dismantret-se nemet gant pesketaerien granked a weled o firbouchal e-touez ar reier bezinek. Maro e oa ar c'hoad.

Warlerc'h bloaveziou a dristidigez hag a zigenvez, emañ c'hoaz ar c'hoadig war-sav. Bihan, avat, eo ar gwez; hogen stank ez int evel gwechall. Kreskiñ a ra pep plantenn hep urz na reolennadur.

N'eus forz ! beo-buhezek eo ar c'hoad adarre.

Ar raden a c'holo ar gwenodennou koz; ne vern !

Spi a zo da wclout c'hoaz ar gwez kempennet a-ratre, ar gwenodennou darempredet gant ar vugale, an dud koz, o tont war ar blasenn vihan geotek, ha deliadur ar c'hoad o tisteurel e c'hlasvez kaer ha fiñvus e dour ar gourlano.

Ar menozioù

Penaos e voe troc'het ar gwez ?
 Piw a zarempredas ar c'hoad ?
 Petra a zo c'hoarvezet abaoe ?
 Ha bez e vo ar c'hoad evel gwechall ?
 Piw a vo laouen ? perak ?

Geriadur

Firbouchal : klask, furchal; enklask.
Tristidigez : pinvidigez; salvidigez; teneridigez.
Spi : esper, fiziañs, goanag; dispi, dizesper.
Gourlen : goulano, mare, chal, dichal.

Kemmadurioù

Pesketaerien granked (krank); a zigenvez (digenvez); a c'holo (goleiñ); ar gwenodennou koz; eur wenodenn goz; o tisteurel (disteurel); e c'hlasvez (glasvez).

Yezadur

Dielfennadur :
e teuas : verb dont, doare diskleriañ, amzer-dremenet-striz trede gour, liester.

koadourien : ano boutin, gourel, liester, rener ar verb *dont*.
a : ragano-stagañ a gemer lec'h an ano koadourien; rener ar verb troc'hañ.

holl : ano-gwan damziskouezañ, stag ouz an ano gwez.
 (g) *wez* : ano boutin, gourel, liester, renadenn eun ar verb troc'hañ.

kaer : ano-gwan doareañ, stag ouz an ano gwez.
betek : araogenn.

Displegadur : Bezañ

Stumm boazañ		Stumm lec'hiañ	
Bremañ	Amdremenet	Bremañ	Amdremenet
atao e vezan	alies e vezen	amañ emañ	neuze edon
— e vezez	— e vezes	— emañ	— edos
— e vez	— e veze	— emañ	— edo*
— e vezomp	— e vezemp	— emañ	— edomp
— e vezit	— e vezec'h	— emañ	— edoc'h
— e vezont	— e vezent	— emañ	— edont

Poelladennou

1. Lavarit penaos e vez diskaret eur wezenn.
2. Dielfennit ar gerioù-mañ : Ar raden a c'holo ar gwenodennou koz.
3. Displegit ar verb : *Bezañ klañv dalc'hmatal* (stumm boazañ).
4. Petra a vez graet gant koad ? Pelec'h ha penaos e vez stummet ?

TAOLENN

Kentel	Pajenn
1. An devez kentañ	2
2. An aval	4
3. Penndu	6
4. Ar Chaseour	8
5. Ar goañv	10
6. Kouignioua !	12
7. War ar skorn	14
8. Ar boulom erc'h	16
9. E korn an oaled	18
10. Ar marc'h houarn	20
11. An nevez amzer	22
12. An evned	24
13. Ar bleuniou	26
14. Ar neiz	28
15. Ar pesk ruz	30
16. Ar gevridenn	32
17. An aerlestr	34
18. Ar peroked	36
19. Bezomp naet !	38
20. Ar foenn	40
21. War ribl ar stêr	42
22. Ar c'hoad sioul	44
23. Ar mor	46
24. Ar foar	48
25. Al labouradeg	50
26. Gouel ar barrez	52
27. An ehan-skol	54
28. An tañvouesa	56
29. Koad al louarn	58
30. Koad al louarn (<i>kendalc'h</i>)	60